


KANTIKOU

en enor da

ITRON VARIA GERNITRON

Karunet e Lanmeur



ar

15 A VIZ EOST 1909

PRIZ

3 GWENNEK

MONTROULEZ

MOULLEREZ AR GWAZIOU

1909

8N4-2-005

KANTI-KOU


EN ENOR DA

Itron-Varia Gernitron

Kurunet e Lanmeur

ar

15 A VIZ EOST 1909



MONTROULEZ
MOULLEREZ AR GWAZIOU

1909

GWERZ ITRON-VARIA GERNITRON

DISKAN

Mam vad ar Vretoned, Mari, lilien gaer,
Bet a viskoaz karet er c'horn-man a Dreger.
Evel hon zudou koz, ni holl a greiz kalon,
A c'houlen ho pennoz, o Gwerchez Kernitron.

Mam vad ar Vre-to-ned, Ma-ri li-li-en
gaer, Bet a vis-koaz ka-ret Er c'horn man a Dre-
ger, E-vel hon zu-dou koz, ni holl a greiz ka-
lon, A c'houlen ho pen-nouz, O Gwerchez Kernitron!

Adalek ma teuas sklerder ar fe gristen
Da drec'hi, en Arvor, war an denvalijen,
Hon ebestel gentan, hon zent meurbet karet,
A westlas hon bro-ni d'ar Werc'hez vinniget...

A westlas hon bro-ni da Vari, Gwerchez c'hlan,
D'an hini a frikas, dindan he zroad, Satan ;
Ha kerkent, gant doujanz, Arvoriz a stoue
Evit trugarekat ar Werc'hez, Mam Doue.

Neuze, en ber amzer, e welched o sevel
En traonien, war vene, en pep lec'h eur chapel,
Chapel, lec'h a ziskwiz, gwir borched an Nenvou,
Feunteun vadelezes ha mammen o c'hrasou...

Chapelig Kerfeunteun, (1) ar gentan bet zavet,
A deuas, dre ar vro, da vezan gwall-vrudet ;
Rak enni ar vam vad, Rouanez Kernitron.
A baree d'an holl poan gorf ha poan-galon.

Evel eur vluen gaer en kreiz ar spern, an drez,
Pe henvel ouz tour-tan war ribl mor digompouez,
Ar berlezen zantel a deule he c'houez vad
Hag a henche d'ar porz bagig ar merdead...

(1) Kerfeunteun a oa gwechall hano Lanneur.

Hag an dud, en eur vouez, a veule he hano,
 Ha brud an itron vad a rede dre ar vro ;
 Er park, er c'hoajou don, bemnoz er tiegez
 An holl, koz ha yaouank, gane he madelez ;

Hag ar Werc'hez Vari a vije evurus,
 O kiinig pedennou bro-Dreger da Jezus,
 Hag ar Mabig bihan zigore e galon
 D'ar bobl bet dibabet gant Gwerc'hez Kernitron...

Piou a c'halla laret pegement a c'hrasou,
 Evel eur c'hlizen vad a-dreuz d'ar c'chantvejou,
 A zo gant ar Werc'hez war Gerfeunteun skuilhet,
 Grasou anevezet, ive grasou kuzet ?

Rak aman ar c'hianvour a gav ato yec'hed,
 Aman an den poaniet a gav evurusted,
 Aman ar pec'her kez, danvadig dianket,
 A gav dreist-holl ar peuc'h, ar peuc'h a oa kollet...

Aman ar beajour a gav tomder ha nerz,
 Aman ar reuzeudig a gav dalc'hmad kennerz,
 Aman an intañvez a gav gwir digemer
 Hag an emzivad paour a gav eur Vam dener !

Aman ez eus eun ti, eun ti bepred digor,
 Darempredet gant tud an Argoad, an Arvor ;
 An neb a deu d'ezan na dec'h hep e vennad,
 Rak Gwerc'hez Kerfeunteun a zo eun Itron vad !

Martolod ha zoudard, labourer, micherour,
 Kement a deu aman da glask skoazel, zikour,
 A dec'h laouen, seder, hag a greiz e galon,
 A lavar mil bemnoz da Werc'hez Kernitron !

Da zevez ar pardon, pa vrall drant ar c'hleier,
 Pa nij o mouez sklintin a-us d'hon lanneier,
 A Dreger a Gerne, kenkoulz hag a Leon
 E tired Bretoned da chapel Kernitron...

Ouz troad *Kroaz ar Salud*, adalek ma welont
 Ti Gwerc'hez Kerfeunteun hanter-guzet, du-hont,
 E kouezont d'an daoulin, ha, neuze gant dudi,
 E lavaront d'o Mam : — Ni ho salud Mari !

Kantvejou a dremen, ar bloaveziou a dec'h,
 Mes Gwerc'hez Kernitron, hirie c'hoaz evel dec'h,
 A zo karet, pedet, ha bemde, ha bemnoz,
 Gant bugale vihan kenkoulz ha gant tud koz...

Setu perak ive ez eo deut da vezan,
 Nan hepken eur yam vad, eur vam euz ar gwellan,
 He bugale ouspenn, dre wir anaoudegez,
 A zo deut d'he c'hemer evit o Rouanez.

Hag vel Rouanez, Rouanez c'halloudus,
 E lakont war he fenn eur gurunen skedus,
 Kurunen ginniget gant pinvidig, gant paour,
 An holl o deus roet o gwenneg, o fez acour...

— Rouanez Kernitron !... Mari, Stereden-Vôr !
 Ho pobl a zo stouet amañ dirak ho tôr,
 Ghilaouit hon feden, teurvezit, o Gwerc'hez,
 Trei war ho pugale eur zell a vadelez !

Trei war ho pugale eur zell a drugare,
 Ha miret en o c'hreiz, miret doujanz Doue ;
 Pegwir ho peus gwechall hon zud koz diwallet
 Diwallet ac'hanomp breman, Itron garet !

A bep tu na weler nemed koumoul terval,
 Korventenn ha kurun a glever o strakal ;
 Ar spont en hon c'halon e tiredomp d'ho ti...
 — Zikour, en han Doue !... Zikour, Gwerc'hez Vari !

Biskoaz, biskoaz n'ho peus dilezet eur beden
 Biskoaz n'ho c'h bet chomet bouzar d'eur c'halvaden,
 Roit d'hon Bro ar peuc'h, roit d'imp ar furnez
 Ma vefomp-ni ho pobl... Breiz ho rouantelez !

Ha pa digouezo d'imp kwitat an draouien-ma
 Groet ma savfomp kerkent d'an Nenv en eur gana,
 En eur gana dinec'h ha war ar c'haeran tòn :
 Meulodi, meulodi da Werc'hez Kernitron !!

Kerbernez, 2 Gouere 1909.

AR YEODET.

Imprimatur :

Cortisopti, die 29 Julii 1909.

A. COGNEAU,
vic. gén.



ENOR HA PEDEN

da Verc'hez Kernitron



VAR DON : *Kantik Lambader.*

DISKAN

Kanomp, kanomp a greiz kalon
Henor d'hor Mamm a Gernitron,
Ha goulennomp ma kendalc'ho
Da skuill he bennoz var hon bro !

1

Guerc'hez santel, mamm da Zoue,
Lezit Breizis, ho pugale
Da gana d'eoc'h a vouez ho fenn :
Gloar hag henor da virviken !

2

C'hui zo d'eomp holl hor Patronez,
Hor Mamm hag hon Alvokadéz !
C'hui skuill eun tenzor a c'hrasou
Bemdez var hon holl parreziou !

3

Ken braz galloud n'eo ket souezus :
En ho chapel ni vel Jezus
O lezer ganeoc'h he voalen
A roue var ar bed kristen !

4

Penaoz biken e c'hellimp-ni
Anaout awalac'h, ô Mari,
An die o deuz en ho kenver
Ho pugale a vro Dreger ?

5

'Vit guelloc'h ho trugarekât
Euz ho skoazel, Patronez vad,
Ar Pab guir Dad ar gristenien
A ginnik d'eoc'h eur gurunen.

6

Evel er Folgoët, er Porzou,
E Rumengol, e kalz leac'hchou
E Kernitron iviziken
C'hui zo Rouanez da viken !

7

Renit varnomp, Guerc'hez santel !
D'hoc'h henori ni vo fidel,
Ni a zeuio da bardona
Ha d'ho meuli en eur gana.

8

Ni a ginnigo d'hor Zalver
Ar sakrifis var hoc'h aoter,
Hag a boanio, dreist holl, Guerc'hez
Da heuilla skuer ho santelez.

9

O rouanez karantezus,
Hor c'hassit holl d'ho Mab Jezus,
Hor sikourit e peb danjer :
Hor c'hâlon a zo ken dister !

10

En hor bro Frans eun avel foll
A dag ar Virionez dre-holl ;
Guerc'hez mirit hor sperejou
Dious bilim ar falz-kredeñnou,

11

Grit ma chomo grisiou ar feiz
Doun e kalonou Tregeriz
Evel griziou ar guez dero
E kreiz kalon douar hon bro.

12

Gant holl blijaduriou ar bed
Hor c'hâlon baour 'zo touellet ;
D'ober dezho bemdez brezel
Hor sikourit, Guerc'hez santel.

13

Pellañt diouz ho pobl kristen
An darvoudou hag ar vossen ;
D'ar vugaligou afflijet
Rentit an nerz hag ar lec'hed.

14

D'ar yaotankiz roit furnez,
D'ar vugale sentidigez,
Ha d'ar gosni kalon nerzus
Da ziwoaska buez poaniuz.

15

Pa deui an anken d'hor voaska,
Pa deui hor c'hâlon da ranna,
En hor glac'har, en hor enkreiz
Deut d'hor souten, Mamm a druez.

16

Ha pa vimp galvet gant Doue
Grit ma vo prest ho pugale ;
Evel hor zant Melarik kez
Da ginnik dezhan ho buez.



Imprimatur :

Cortisopti, die 16 juuli 1909.

A. COGNEAU.

etc. gen.



Cantique en l'honneur de N.-D. de Kernitron

TON : *Cantique de St-Corentin.*

REFRAIN

O Vierge sainte, o Notre Mère,
A tes genoux nous t'implorons
Daigne sauver notre prière,
Bénis et sauve tes Bretons.

1

Mère de Dieu, tes enfants de Bretagne.
Sont accourus à la voix du pasteur,
De nos cités, des champs, de la montagne
Pour célébrer de ce jour la splendeur.

2

Car aujourd'hui, grande et douce patronne,
Rome a voulu qu'à ton front radieux
Vint resplendir la brillante couronne
Que prépara la foi de nos aïeux.

3

Treize cents ans ont passé depuis l'heure
Où de par Dieu le Pontife de Dol
Edifia la première demeure
En ton honneur sur cet antique sol.

4

On dit qu'alors une aimable princesse.
Sainte d'Armor, Tryphine était son nom,
Abandonna ses biens avec largesse
Pour embellir l'œuvre de Saint Samson.

5

Et chaque jour à ce doux sanctuaire
Elle venait, victime de douleur
Remercier la Vierge tutélaire
Qui lui rendit et la joie et l'honneur.

6

Survint plus tard l'heure de l'épouvante
Où les méchants renversaient les autels
O Kernitron, tu subis la tourmente,
Mais Dieu seul fait les décrets éternels.

7

Et Dieu voulut qu'on refit à sa mère
Plus belle encore son antique maison,
Et qu'à son ombre un pieux monastère
Et nuit et jour put célébrer son nom.

8

Et désormais les pèlerins en foule
Le rediront aux échos d'alentour,
Et chaque instant de l'heure qui s'écoule
Sera témoin des dons de son amour.

9

Les cœurs chagrins, les âmes converties
Se soumettant à la loi de Jésus,
Les corps guéris et les larmes tariés,
Le ciel ouvert à de nombreux élus.

10

Oh! sois bénie, o puissante Madone,
Et reste encore la reine des Bretons,
Nous le jurons sur ta sainte couronne,
Sans défaillir, toujours nous t'aimerons.

11

Veille sur nous, protège notre France,
Donne aux pasteurs qui dirigent nos pas
La noble ardeur et la Sainte vaillance
Qui savent vaincre à l'heure des combats.

12

garde en nos cœurs la foi sincère et pure
Toujours en fleurs comme nos ajoncs d'or,
Fais qu'en dépit de l'enfer elle dure,
Tel le granit du beau pays d'arvor.

Imprimatur :

Quimper, 2 Juin 1909.

† ADOLPHE,

Ev. de Quimper et de Léon.



KANTIKOU

en enor

da Itron-Varia Gernitron

KENTA KANTIK

TON : *Katolik ha Bretzad bepred.*

DISKAN :

Mil bennoz, o guerc'hez Kernitron,
'Vit ar c'hrasou skuillet var douar Breiz-Izel
Klevit ar ionaden a strink eus hor c'halon
Deoc'h ato ni vezo fidel.

1

Galvet gant mouez hon Eskop karet
'Vel denved gant eur mesaer,
Ken tud eurus; ken tud glacharet,
Oll ez omp deut d'ho chapel gaer.

2

Diredet omp gant eur feiz bero
Hag eur garantez leun a c'hor
Euz kement leac'h ma voud an dero,
Euz kement leac'h ma kan ar mor.

3

Diredet omp lod eus an Arvor
Ha lod all eus kreiz an Argoad ;
Hag oll, evit renta d'eo'h henor
Ha diskouez anaoudegez vad.

4

Anaoudek omp eus ho madelez
Ker braz evit hon tadou koz.
Dalc'het ganeoc'h er guir Santelez
Ha dougennet d'ar Baradoz.

5

Anaoudek omp eus ar garantez
A ziskuezit en hor c'henver,
Hag a red gant ker braz largentez
Eus ho kaloun dous ha tener.

6

Mil bennoz d'eo'h a berz ar c'hlanvour
An deuz bet ar primma pare,
P'en deuz goulennet gant ho sikour
Eur zell tener a drugare.

7

Mil bennoz d'eo'h 'vit al levenez
Ho peus skuillet er c'halonou,
P'o deus kaset en ho diehez
Betek enno'h o fedennou.

8

Bennoz d'eo'h a berz an den a vor
Miret ganeoc'h da vont da goll
P'an deus klasket enno'h ar gouder
Eneb kounnar an avel foll.

9

Bennoz ive a berz ar c'houer
A ve ken douz he blaneden
Pa gas dreizoc'h betek e Grouer
Gant eur feiz nerzus he beden.

10

Bennoz dreist holl 'vit an eneou
O deus kavet ar sklerijen
P'o deus distrujet an ereou
Skignet gant an denvlijen.

11

Hag evit rei d'eo'h eun testeni
Eus hon trugarez peurbadus,
Ez omp diredet d'ho kuruni
Gant eur gurunen aour skedus.

12

Er baradoz daouzek stereden
En dro d'ho tal a lugern splamm,
Hiviziken en dro d'ho skeuden
E lintro eur gurunen flamm.

13

Setu guerc'hez ar c'haëra bennoz
Hon deus kavet en hor c'halon,
Evit dic'hlea kement mennoz
Ho peus klevet e Kernitron.

14

Guestla reomp c'hoaz dirak ho skeuden
Derc'hel bepred d'ar guir feiz krenv
Evit d'hon tro kaout eur gurunen
Eus ho torn mad, eun deiz en env.

Imprimatur :

Lambézellec, 16 Juillet 1909.

A. GADON.

v. g.



EIL KANTIK

VAR DON : *Breuriez ar Feiz*

DISKAN :

Mari, mamm garantezus,
Patronez vad Treguer,
Grit eur zell trugarezus
Ous ho pugale ger ;
Braz meurbed eo ezomrou
Hor c'horf hag hon ene ;
Varnomp dre ho pedennou
Tennit puill gliz an Ee.

1

5

Plou e Breiz ne anavez
Ar japel benniget
Pell braz zo gant eur brinsoc
En hoc'h enor savet ?
Ar brud euz ar miraklou
A rec'h ennhi guechall
Zo ét, dreuz ar c'hantvejou,
E pevar c'horn Bro-C'hall.

2

Mar grit rouessoc'h brema
Vit ar c'horf miraklou
Kendalc'hit da barea
Klênvéd ar sperejou ;
Lezennou Doue zo bresset.
Gant kaz tud en hor Breiz.
Kals eneoù zo taget :
Truez evit hor felz.

6

Euz kalz broiou e tired
Etrezek Kernitron
Bandennou pelerined
Birvidik ho c'halon ;
A bell kerkent 'ma velont
An tour 'zo var hoti,
Devot eur c'hlin a blegont
Evit ho saludi.

3

Ar beden grêt aliez
Hag ar Sakramanchou
Ha zo guir vagadurez
Ha nerz an eneoù ;
Red e ve neuze poania
Da c'houlén gras Doue
Ha da zibri ar bara
Diskennet euz an Ee.

7

Tud ho c'horf kountamet
Gant bep serc'hoù
Tud lor, tud puz, tud seizet,
Tud dall a serrou
Deuet da glask ar pare
Euz Treguer, Kerne, Leon,
Ioa sur da gaout gras Doue
E japel Kernitron.

4

Brema 'zeuz fors bloaveziou
Var menez ar Salett
O poa great deomp gourdrouzou
Dre holl anevzet :
« Ma kendalc'hit da doui
« Da derri zul Doue
« Varc'hoaz ne c'hellin mui
« Diarbenn tan an Ee. »

8

Ar flac'hou, ar branelloù
Ioa c'hoaz a nevez-so
A zispill ouz mcgeriou
Ho japel tro var dro
Enkanto a vouez huel
Pegen brokuz oc'h bet
Da rei sikour, ha skoazell
D'an dud en ho c'hervéd.

En despet d'ho kourdrouzou
Ken leun a garantez
E labourer d'ar zullou
Dirkrupul ha divez.
E leac'h kertzet d'an iliz
Vit klevet au ofern
Nag a dud, sionaz ! e Breiz
A heul hent an ifern.

9

13

Stank eo ive an denved
Eal dioc'h an denved all
Da eva dour kontamet
Da glask eur peuri fall ;
Digassit hi d'ar goudor,
Da bark ar pastor mad,
Ma na vo med eur pastor
Ha nemed eur parkad.

10

Ni fell deomp hiviziken
Renons d'ar malloziou,
Karet, Doue, he lezenn,
Miret start ar zullou ;
Mad e vezimp da bedi
Bep mintin ha bep noz,
Guelloc'h da sakramanti
Da glask ar Baradoz.

11

Kasit, mam drugarezus,
Hon daelou, ha glac'har
Beteg tron ho mab Jezus
Hag hini Sant Melar :
N'oc'h ket heb guir lezhanvet
« Refuj ar bec'herien »
Dreizoc'h e vimp pardounet
Ho tra vimp da viken !

12

Guelet a rit ar brezel
A ra Satan hirio
D'an iliz hor mamm zantel
Da Zoue ha d'hor bro ;
Senti 'ra ouzoc'h bemdez
Ar mor, an avel foll,
Sellit ouzomp a druéz
Mirit na zaimp da goll !

E Lour'd e rit traou dispar,
Ah ! grit eur burzud all.
Mamm Jezus, dioc'h ar c'hailhar
Goalc'hit pelloc'h Bro-C'hall !
Neuze pebez levenez !
C'houi vezo adarre
En hor bro guir Rouanez
Hag ho mab vo Roue !

14

Abers ar Pab eo deuet,
Guerc'hez, ar gurunenn
A zo bet hirio laket
Ken brao d'eooc'h var ho penn ;
Vit hon tad digant Doue
Goulennit heb bean
Ma vezo fin dizale
D'he groaziou, d'he voelvan.

15

Bennoz d'an Eskop santel
En deuz ho kurunet ;
Dindan plegou ho mantel
Diwallit-hen bepred :
Ra vezo c'hoaz hirr amzer
Goude gouel Kernitron
Gloar hag enor bro Treguer
Bro Gerne ha bro Leon !

16

Lakit en holl galonou
Feiz beo ha karantez ;
Dalc'hit en tiegeziou
Urz vad, senti digez ;
Ha pa vo deuet ar mare
Da vont da gaeroc'h bro,
C'hui hor c'huruno neuze
Er Baradoz d'ho tro !

primatur :

A. GADON,

Lambézellec, 19 Juitet 1909.

v. g.



TREDE KANTIK

TON : *Itron Varia Rumengol.*

DISKAN :

Itron Varia Kernitron,
Dous dreist an holl, pur a galon,
Grit ma talc'himp hed an amzer
D'ar fe gristen e bro Treger.

1.

E Breiz-Izel, o Mam garet,
Kalz ilizou dec'h zo gwestlet,
Hag enn-ho var ho pugale
E skullit puill grasou Doue.

2.

Hon tadou koz, stard en ho fe,
Evel ar roc'h var ar mene,
O deus flouret gant ho c'hazel
En hoc'h honor mein Breiz-Izel.

3.

Chapel Kreis-Ker e Kastel-Pol,
Gant he zour dantelezet holl,
A lavar d'an dremenidi
Karante Breiz evit Mari.

4.

Kossoc'h eo c'hoaz iliz Treger
En honor da Vam hor Zalver.
Ha gant eur guir relijion
Eo bet hanvet *Ker an Itron.*

5.

E Rumengol hag er Folgoët,
Skeuden Mari zo kurunet. —
E Kernitron, hiviziken
Ker skeduz eo he c'hurunen.

6.

Ia, leun a fianz e Mari,
Tregeris a gar he fedi,
Ha goulen a greis ho c'halon
Benno's ho Mam a Gernitron.

7.

Pa ziroll an avelou foll,
Pa vel he lestr o vont da goll,
An den a vor en em erbed
Ouz Mari, Mam ar Vretoned.

8.

Ar c'houer, skuiz gant he labour
Er park, a c'houlen he zikour,
Ha gant eun *Ave Maria*
Eo sur ganthi deus he vara.

9.

Ar vam, e kichen ar c'havel,
En eur luskellat he bugel,
Evit an ealik bian kousket
A bed ar Verc'hez benniget.

10.

Ha pa zivun ealik Doue,
He lagadik liou eabl an Ee
A bar var ho skeuden, Mari,
...Ar plas honor o peus en ti...

11.

Bezit eurus, mamou kristen,
Rag ar Verc'hez, en ho kichen,
A veillo var ho pugale
'Vel ma veillas var Mab Doue.

12.

Ho potrezed, fur ha sentus,
A zesko mad hent ar vertus,
Hag a vezo honor ho ti,
Ma zint guir vugale Mari.

13.

Hag ho potred, hed ho puez,
A rei ho choa, ho levenez ;
Biken ne raint dec'h ran-galon
Ma karont Guerc'hez Kernitron.

14.

Eat d'an arme, pell deus ho bro,
Ar Vam zantel ho diouallo,
Ha gant he skoazel burzudus
E chomint fidel da Jesus.

15.

O Guerc'hez santel, hor Mam ger,
Beillit ato var bro Treger,
Hag eun deiz ni c'hello kana
Eb ean an *Ave Maria.*

Imprimatur :

Quimper, le 8 Août 1905.

E. FLEITER,
Vic. gén.

PEVARE KANTIK

TON : *Gwir Vugale ar Werc'hez
(an etl)*

DISKAN :

Kanomp hirio, Tregeriz, kanomp a greiz kalon
Madelez ha meuleudi Patrounez Kernitron,
Ha goulennomp diganti beza guir gristenien
'Vit gallout er baradoz, he c'haret da viken.

1

Gwerc'hez Vari, ho chapel, a bep amzer Brudet,
Gwechall-goz war roc'h Lanmeur, gant ar venec'h savet,
Daoust d'al laeroun-vor disakr, ha d'an oll reusiou,
A chomas soun en he zav, a hed ar c'hantvejou.

2

'Vel ho ti war ar c'herreg, zo diazezet mad,
Ho karantez zo griziet, e kalon ar Breizad ;
Ha birviken diganthan, netra n'he diframmo,
Nag ar boan, nag ar brezel, na zoken ar maro.

3

Ar protestant digalon, gant eur gounnar spoutus
A nac'h en e falz kreden, ez oc'h mam da Jezus,
Mez en desp't d'e gomzou ennoc'h ni a gredo,
Ha dirak ho skeuden gaer, bemdez ni ho pedo.

4

Ma ne glever tro war dro, nemet ho meuleudi,
Pell-pell dreist an oll broiou e karit hor bro-ni ;
Ha ma chomfemp diseblant 'vit eur vam ken tener,
'Rankfemp maga kalonou kaletoc'h eget reier.

5

Plou zival ar c'hraouadur, kousket en e gavel
Dindan sell eurus he vam e c'hortoz da sevel ?
Plou gutuil er baradoz, mousc'hoarz douz an Elez,
Evit sederaat he zremm, nemedoc'h-hui, Gwerc'hez.

6

Pa vez ar goad tommet gant tan ar yaouankiz,
Ar vuez en eur virvi, o klask joa ha frankiz ;
Dre eun dourn dous ha nerzus, c'houi a ren ho pugel,
Hag e renk an dud dinam, 'ra d'ezan kenderc'hel.

7

Pa zav an heol er menez gant e vannou laouen
En douarou ar c'houer a ra d'eoc'h eur beden,
O senti ouz ho mennad, Jezus 'lak da zavel
Eleiz a vleuniou koant, enno frouez o c'hevel.

8

Pa vez war ar moriou doun an avel o yudal,
Ar martolod en anken a sonj' ennoc'h raktal,
Hag e lestrig sturiet gant rouanez ann Nenvou
A gerz en dour eonennet, a lamm dreist an tarsiou.

9

Heb Jezus hon ene paour 'zo dinerz da veva,
Hag henvel oc'h eur blantenn dare da zizec'ha,
E zorn en deuz eus an nenv tomder ha sklerijen
'Vit douara e gras Doue hag enni kaout grizien.

10

Deuit eta davedomp gant ho sikour nerzus,
Deuit, o gwerc'hez Vari, gant hor Salver, Jezus,
Ha war e galon a vreur, dinec'h ni a vevo,
Ha ganeoc'h-hui kernnerzet, direbech a jomo.

11

D'an den-vor ha d'ar c'houer, Gwerc'hez roit skoazel,
Diwallit ar micherour, ar soudard er brezel ;
Dioc'h an den mac'hagnet pellait peb anken ;
Ra vezo an nenv digor d'ar c'hlanvour a dremen.

12

O mam vat, grit ma vezo, en oll diez kristen
Ar c'herent beprep a du da viret ho lezen ;
Ha dre o aliou santel ar vertusioù kaera
E kalon o bugale zeulo da ziwana.

13

Goulennit digant ho mab evit ar vretoned
Karantez, yac'h ar galon ha feiz krenv ar spered,
Ma vevint evel breudeur 'n eur heuil ar skouerioù.
A lealdet, a furnez, roet gant ho zadou.

14

Komzit ouz mistri ar Franz, ha grit d'ezo kompren
'Reont labour didalvez, o terri ar chaden
Hor stag oc'h Iliz Jezus, rak daoust do urz garo
Ar vretoned evel kent oc'h ar pab a zento.

15

Renit eta, o Mari, hor buez pean-da-benn ;
Bennigit hor plijadur gant hon oll labour tenn ;
Hag evelse ep ehan tiskanimp a galon
Madelez ha meuleudi hor mam vad Kernitron.

Imprimatur :

Lambézellec, 19 Juillet 1909

A. GADON,

v. g.
